

CHANSON

NEVOE KOMPOZET

DA VOERSET CANTON LANMEUR.

Gwerc'hez gloriüs Vari hag ho Mab binniguet,
Diganeç'h e c'houlennan sklerijen d'am speret
Ma helfet rei din ar pouvoar hag ar baissans
Vel ma deva zant Louis pa voa roue en Frans,

E mije implet ma amzer da zont da rima,
Sklerijen d'am daoulagad evit dont da skriva ;
Zeleovit a galon c'houi sperejou zo parfet,
Entrezoc'h tud iaouank na vefet ket dallet.

Me ho suppli bretonnet prestit ho hintansion
Da glevet eur c'himiad truezus a doucho ho kalon,
Eur c'himiad leun a c'hlac'har deus an truezussa
A zo nevez composit evit ar blavez-man.

Deuz beurs ar maestro eo bet an ordrenamant
Da denna ar billejo vit ar blavez presant
Er blavez mil eiz-kant dek ha tri-uguent
D'ar zeitek a vis lloerver vit rei dec'h da intent.

War dro creiste-anter, pe eun heur d'an irra
Voa zonet an taboulin deze d'en em remta ;
En em remta ra ar gonskrivet iaouank promptamant
Pa renquest ober desir ar Gouarnamant.

Pa voant galvet evit antren da denna
E kommans ho izili da zont da grena
An dra-ze voa eur skoer ma rankent mont d'ann arme
Skulltan reont daero, reont ket hep zujet.

D'ar zeitek a viz Hoerver, zo tremenet,
Deva renket an dud iaouank tenna ar billet ;
Evel ma renkent partia ha kuitad ho bro,
Done ho c'honduo elec'h ma deziro.

Tud iaouank, vit an arme deuz ar re derupla,
Glac'haret eo ho ligne p'ho goelont ho partia ;
Partia reont brema, vit mont d'an aesion,
Benet a zaelo ho zud ker gand dezolasion.

Me ha da ziskleria dec'h betek fin ar breuvan
Deuz ar glac'har zo'en mesk an oll Frausijen,
War ar zujet demeus ar revolusion
Oll e renkont kuitad evit mont d'an aesion.

Ar lezen a zo deut vit goulen ugent blavez
Demeus a bevar c'horn ar Republik nevez,
Hag an dud ansien a zo voar ar bed-man
Deuz biskoaz goelet ar pez a voelont breman.

Renkont ra ar werset iaouank mont er mæz ho bro :
Me a gred a vo mantret oll kement e c'hlevo ;
Partia a renkont, leun deuz ar brassan glac'har,
Daelou ho daoulagad deu da c'hlebia an douar.

An tado hag ar mamo a zo ker dezolet,
Hon breudeur, hon c'hoarezet, a zo oll glac'haret,
Hon c'halono en hon c'hreiz a zo ker contristet
Pa renkomp kuitad an heb hen detz hon maguet.

Kenavo tado, mamo pa renkomp ho kuitad
Hon breudeur, hon c'hoarezet, oll e voac'h bepret mad,
Ha c'houi anoudeguezet gant eur galon mantret
Pa renkomp ho kuitad vit mont d'ar prussianet.

Ho zud hac ho ligne zo breman oll o voela,
O klevet ar baotret kez en em c'himiada ;
An tado hac ar mamo lavar d'ho bugale :
Poket din c'heas eur vezaj arog mont d'an arme.

Deut c'hoas entre on divrec'h arog hon kuitad,
Koll a reomp an avantag-ze, o pebez kalonad !
N'eur bokat a reont vit ar veaj divean.
An daelou en ho daoulagad zo ho tisillan.

Aotrou Doue eme 'n tado paour, pere voele,
Er momet an disparti deus ho bugale,
Breman e rencfet mont zivoaz ! er mæs ar guer
Chomfet ken amian da zoulagin hon mizer.

Hon c'halono zo fraillet dre nerz an ankenio,
Hon daoulagad zo beuet en eur mor a zaëlo :
All-s ! deut eo an devez ma renkomp ho kuitad,
Kemen glevo ac'hanomp devo kalonad.

Ma ne deut oll da voelan o klevet ar sujet,
E hoc'h kals krioc'h evit neo an tirantet,
Pere goejal ho deus bet an infam grueldet,
Da gondanin d'ar maro hor Zalver benniguet.

Red eo dimp, hon zud kez, dont d'en em separi,
Nallomp ken chom ganec'h da harpa ho kosni,
Ar lezen zo didruez, deut eo an ordenans,
Red eo dimp ho kuitad evit heuil banniel Frans.

Goude bean paet eun den evit hon remplasan,
A renkomp ho tilesen, kuitad hon bro bremen,
An amzer evurus a zo buon tremenet :
Memes tra vel an deillo gant an avel kasset.

Kenavo beret ar barous, douar benniguet,
En pelec'h e mamp ar sonj da veau interret,
Da vouel 'n anaoun klemmus na deufomp war ho beziou
Da skuilla dour benniguet gant kals deus a ganvou.

An daelo 'n ho daoulagad a c'hlebie ar vein be,
A kals a dud eno gant glac'har braz a voele,
O voelet ar woerset ho c'hober ho c'himiad,
A marteze reont nezan zivoas ! evit mad.

Kenavo d'ar beleien, d'an oll dud a ilis,
Mair hag adjoint, ha mempro deuz an dud justis,
D'an dud ansien ha da guement a meum karet,
Ha da ganton Lanneur, ha de oll habitantet.

Pa e deut ar lezen abeurs ministr ar brezel,
Eo red imp ho kuitad, pa e ver deut d'hon guervi
Evit en em difen deus an oll enimet,
A deus c'hoant da exerci voarnomp ho c'hruellet.

Tevet, tevet buon, ma breudeur, na ne voelet ket,
Tachet da n'em gonzoli, em gonformi zo ret,
Entrezoc'h, goerset yaouank, bevet en esperans,
Doue, hon Tad mad, a zo bras he brovidans.

(Propriété.)



Ar Gard mobil zo konolet dre gomzou charmant,
An eil a lavar d'eguite gant eur galon gontant :
Entreomp, breudeur iaouank, demp kontant d'an arme,
Zikouromp ar Fransijen zo en risk ho bue.

Me ho suppli, tado ha mam, kent ho kuitad,
A breudeur a c'hoarezet, mignonet dous ha mad
Pedet Doue hag arWerc'hez Vari evidomp
Hag hoa Elez mad hen devo zonzj deuz ac'hanomp.

Breudeur ha c'hoarezet c'houi pere a chom er vro
Bezef soign deuz hon zud betek an heur ar maro
Meur a vec'h a veac'h ganomp e deuz bet veillet,
An daelo o daoulagad a c'hlebie an palet.

Demp da bedin ar Werc'hez d'an iliz ker 'n ltron,
Dirag he c'himaj zantel buon 'n em brosternomp ;
Suntret gante ho daouarn, digor ho daoulagad
Da Redemptor ar bed e c'houlennont ho mennad.

Gwir Vab hon Tad Eternel, hon Zalver admirabl,
Me a den d'ho c'hadorin betek ho tabernakl,
Diskennet, mar plij ganec'h eur zellik a druez
Evit ma momp ar chans da zistrei denz an arme.

Drindet zantel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,
Me ho suppli da zikour ho servijer indign,
Hon poan-speret a zo bras, hon studi a zo izel,
Sklerijen c'houlennan diganec'h Drindet zantel.

Dec'h Gwerc'hez gloriou Vari en em adressan
Obtenit din ar c'hras evit gallout rezistan
Din hag ive d'hon breudeur, pa vefomp er gombat,
Vit ma vefomp prezervet deus an tan hag ar goad.

Deuz ouzoc'h, zent ha zentezet, nin guimiadomp ket,
Esperans e meum e vefet hon gwir avocadet,
Evit goulenn gant hon Doue ma momp ar chans ker
Da dont vel zoudardet vaillant promptamant d'ar guer.

Arriout reont er ger zoudardet Breiz-Izel,
Ho c'halon zo zeder, goneet deuz er brezel,
Distrei reont d'ar guer, oll karguet a joaüstet
Ho c'herent, ho mignonet a zo tout ravisset.

Pedomp oll aman vit ar re zo desedet,
Evit ma c'hefont da repos d'an evurustet ;
Gras dimp da n'em voelet er Pales selestiel,
En hano an Tad, ar Mab hag ar Speret santel.

Guillaume MERER.